

NE GAVAN KET PLIJUS

— Ober 'ran gwerzennoù ? Ya, ober 'ran gwerzennoù.
N'eo ket va micher, ha ne blij ket din bezañ anvet barzh !
Va micher 'zo bet a-viskoazh troc'hañ buzhug.
Ha komz 'ran d'am loened 'vel pa vefent bet tud...
Va micher am eus kavet atav plijus,
Evel ma kav plijus ar pesk an dour.

Met bez 'z eus traoù ha n'o c'havan ket plijus,
Hag hen lavarout a rankan :

Ne gavan ket plijus gwelout maezioù va Bro
O tistreiñ da fraost ha da repu d'al loened gouez.
Ne gavan ket plijus gwelout savadurioù va Bro
O tremen e daouarn an Estren evit un dornad paper.
Ne gavan tamm ebet plijus gwelout kleuzioù va Bro,
— Framm ha stern ar Broioù Kelt —,
Razhet didruez ha diskiant,
Na yaouankiz va Bro o redek d'ar c'hêrioù
Da werzhañ o nerzh ha frankiz o buhez
D'ar mac'her o goapa.
Ne gavan ket plijus gwelout kozhidi va Bro
E marvdioù ar c'hêrioù o ouelañ d'o foan gollet,
Na mammoù yaouank va Bro
O komz yezh ar mac'her d'o bugaligoù.

Torfed eo terriñ ar chadenn,
Torfed eo kontammiñ ar Ouenn,
Ha den ne sav e c'her da enebiñ,
Den ! Pe... ken nebeut !

Setu ma skrivan gwerzennoù. N'eo ket va micher.
Evit kuzh enno va glac'har,
Evit kuzh enno evel en ur skrin,
Perlez va daeroù... Ha neuze,
E pelec'h mirout an hadennoù diwezhañ ?
Nemet e vefe e liorz ar Barzh ?

Meurzh 1967

HIRAEZH

A ! na hiraezh am eus d'an Oabl glas
Goude ar sizhunvezhioù louet-mañ !

Tremenet (hervez) hanter C'henver
Ha liv all ebet c'hoazh n'em eus gwelet d'ar bloaz
Nemet an darnig oabl louet-se
E hirgarrezenn va frenestr.

Gwech un Evn o tremen gant tizh ul luc'hedenn.
Ur skourrig kromm ha kreñnek eus ar saprenn c'hlas,
O skubañ hep skuizhañ toenn louet al loch pa vez an
disterañ mouchig-avel.

Ha du-hont pelloc'h en dremmwel
Ur gistinenn dibourc'h, hag hi ken louet all he liv,
Sonn, avat, ha reut evel ur peizant balc'h ha dic'hoarzh
dirak ul luc'hskeudenner.

A ! na hiraezh am eus d'an Oabloù glas ha marellet,
d'an Heol lirzhin ha d'an avel sin,
D'ar gouerioù argant, ha d'ar pradoù gwer gant
perlezenn ar beure war bep geotenn nevez.

A ! na hiraezh am eus...

Ebrel 1964

HIRNEZH

Emaon o radeniñ
Koantañ micher, a larfec'h...
Gwir, met tomm eo,
Ehanomp ur momed.

War va brec'h falz ha forc'hell,
em dorn ur radenenn
mistr ha skañv 'vel un dantelezenn
war vord ar park ec'h azezan
e brizheol ar gwez kistin.

Fronde treantus, fronde mezevellus
ar raden o weñviñ
'n ur hiligañ va fronelloù
'zo aet betek va empenn.
Ha setu me krog da rambreal,
va spered o kantreal
dre wenodenn an eñvor ;
ma tremen dirazon
'vel war ur skramm trellus
va yaouankiz aet e-biou.

Hag e soñjan en amzer dremenet
na zeuio ken en-dro !
Diskar-amzer va buhez,
A, radenenn gell-aour,

arouez an douar krin ha paour,
pebezh planedenn hon hini !
Difrouezh. Dibouez. Dister.
Me 'garfe da vihanañ bout evelhout,
gouest ivez da deurel frond :
frond treantus ha mezevellus
ar varzhoniezh c'hlan.

Genver 1964

MAE HO SALUD MARI

Da Itron Varia Vreizh

Eus daouzek maen ho kurunenn
O skediñ lintrus war ho Penn
Mae ar bempet : an emrodenn
Mae ho salud Mari !

Dre vantell nevez ar c'hoadoù
Marelladur ar gwrimennoù
Dre leton flour an tirienoù
Mae ho salud Mari !

Dre geiz an neizhioù er spenn gwenn
Nij ar gwennili 'us d'al lenn
Ar balanegi blev melen
Mae ho salud Mari !

Dre ar bannoù-heol hag ar barrioù glizh
Sarac'h an delioù en o yaouankiz
Dre ar sev a goeñv garenn ar gwinizh
Mae ho salud Mari !

Dre holl bleunioù frondus ar c'hloz
An avalenned gwenn ha roz
Dre aezhenn glouar ar serr-noz
Mae ho salud Mari !

Dre ar menn, an oan
An evned bihan
An holl voutoù glan
Mae ho salud Mari !

Dre goag ar ran ha kri ar skrilh
Dre gan an adan er gwez-tilh
Dre zour an eien o virbilh
Mae ho salud Mari !

Dre bep perlezenn
War geot ar bradenn
Fronn al lireu gwenn
Mae ho salud Mari !

Dre c'hrougous an durzhunell rous
Dre ar goulmig he mouezh voulouz
Dre drivli glan an amourouz
Mae ho salud Mari !

Dre hiboud sioul an dourredenn
Hirvoud ar skluzioù en draoñienn
Hiraezh ar stêr d'ar mor divent
Mae ho salud Mari !

24 Mae 1966

AN ALC'HOUEZ AOUR

Me an'vez ur c'hastell
Savet 'kreiz ar c'hoadoù
'Zo kuzhet 'n e dourell
Ar c'haerañ teñzorioù.

Prennet e chom an nor
An alc'houez aour kollet
Taolet eo bet er mor
Gant tud diskiantet...

Gant un alc'houez estren
Zo klasket he digor
Bepred eo chomet prenn
Ret kaout an alc'houez aour...

Teñzor, ijin ar ouenn
Barzhaz ha lennegezh
'Chomo kuzh da viken
P'eo kollet an alc'houez.

Kelted dispont ha taer
O deus splujet er mor
Kavet an alc'houez kaer
Digor dor an teñzor.

Hag holl deñzorioù Breizh
Zo dispak er c'hastell
Gant alc'houez aour ar yezh
Digor dor an dourell.

Mezheven 1964

TRAOÙ HIRAEZHUS

— Ur vilin gozh pell 'zo dilezet. Na trist ! Difiñv ha kevrinus o selaou kroz ar skluz.

— Un hent kozh roman, ledan ha sonn, aet da strouezheg. A-boan en e greiz ur wenodenn treuzet-didreuzet gant an drez.

— Dismantroù un ti bihan paour, an iliaev elevezus o c'holeiñ e vogerenoù rampet. Soñj hoc'h eus : en ho yaouankiz e chome aze daou bried kozh seven ha didrouz.

— Taolioù ar glaz-noz gant un devezh erc'h. Na trist ha moug mouezh ar c'hloc'h a-us d'ar maezioù gwenn dindan un oabl izel-izel ha du !

— Klevout a-hed an deiz un dañvadez o vegeliat trist ha nec'het d'he menn gwerzhed.

— Frond an ezañs hag ar jenofl a led atav war va ene un hiraevh dilavarus. Ar soñj eus va mignonez yaouank marvet d'ar mare ma vleugn ar jenofl... se oa gwechall. Hogen frond ar bokidi jenofl gwenn hag an ezañs kemmesket gant glac'har va c'halon yaouank, n'em eus biskoazh ankounac'haet.

— Gwelout ur boked bleunv bepred fresk ha seder en un ti, pa 'z eo gweñvet dija ar bokidi war vez an hini en devoa e gutuilhet.

Gwengolo 1965